




M'HO PEUZ EUR PHONO...



...e kavoc'h pladennoù (disques) brezonek, a re vras, e Kastel ag e leac'h all, en tiez ma vezit e c'hober ho prenadennoù. An Aoutrou Georges SELLERS, eur muziker braz brudet e Pariz, a zo e vuzikat ganet tre ma kanan.

Setu amañ ar pladennoù brezonek am beuz kanet da ziveza :
Son ar Pinard, Perak e choman paotr yaouank, War bordig an dour, Gwir Vretoned, An teodou fall, Ar plac'h diez da gontanti.

Goulennit atao ar pladennoù Gramophone "Mouez e vestr". Arreze eo a re vella.



KOUSK, VA MABIG



Savet ganth ar barz kastellad
Francis MOAL
«Alc'houeder Leon»



KOUSK, VA MABIG

Son ha ton nevez

Savet ganth ar barz kastellad Francis MOAL, «Alc'houeder Leon»

I

Pa z'edhon gwechall bihanig,
Va mamm 'n'heur va luskellat
A gane d'in goustadig,
Raok ma serren va daoulagat :
(diskan)

DISKAN :

*Kousk, va mabig,
Gra eur ch'ouskik mad
Ganth da vammig
Te vo diwoallet mad.
Diouz peb drougou me da ziwallo.
Pa vezi braz, en da vamm te zonjo.*

II

Pa ziwunen diouz ar mintin
Va mamm, bepred em c'hichen,
Velet 'c'hanon o c'hoarzin
A gane d'in me ker laouen :
(diskan)

III

Pa gleve 'c'hanon o ouela,
Deoc'htu veze glac'haret
Ag e stage da gana
Buhan, de mabig muilha karet :
(diskan)

IV

Breman, pa zoun deuet eur gwaz
Me gano ive d'am zro,
D'ar vamm, gant plijadur vraz,
Bemdez, keit a ma vevo.
(diskan)

DISKAN DIVEZA :

*Kouskit mammig
Grit eur c'houeskik mad,
Ganth ho mabig.
C'houi vo diwoallet mad
Diouz peb drougou me ho tiwoallo
Breman, p'oun braz ennoc'h me a
[zonjo]*

FRANCIS MOAL.